



PRIZIOÙ 2012



PRIZIOÙ 2012

AL LOREIDI

Roazhon 27 a viz Genver 2012

RUMMAD BREZHONEGER AR BLOAZ

- 1- Gant Diwan eo bet graet e skoliata gant **Gwenael Oillo**. E Lise Diwan Karaez en deus desket ober gant binviji klewelet ha c'hoant en deus bet d'ober traoù war dachenn ar video. Savet en deus ul lec'hienn "ur bed e brezhoneg" e anv : fent ha startijenn zo gant e filmigoù.
- 2- **Andre Le Meut** en deus desket brezhoneg d'an oad gour gant Stumdi. Un den brudet e bed ar sonerezh eo ha dre ar yezh en deus cheñchet labour : dilezet bed an aveerezh evit mont da labourat evit Dielloù kuzul-departamant ar Mor-Bihan. E gefridi a zo labourat war dielloù sonerien ar vro ; hep ar yezh, diaes e vefe mont tre er glad-se, gant ar yezh en deus lakaet war wel d'an holl sonennoù hag ar sonerezh bet dastumet gant an Diberder 100 vloaz zo.
- 3- Ur gembreadez eo **LLeuwen Stefan**. Desket brezhoneg ganti d'an daoulamm ruz gant Roudour he deus divizet kenderc'hel d'ober ar pezh a rae he brud e Kembre : kanañ met e 2 yezh bremañ, kembraeg ha brezhoneg.

RUMMAD EMBREGEREZHIOÙ

- 1- Denez Pichon eo pennrener **Askorn Medical**, un embregerezh a zo e Saozon-Sevigneg. Brezhoneger eo-eñ ha divizet en deus ober gant ar brezhoneg e skoroù kehentiñ e stal a zo arbennikaet war ar reizhoù mezegel. E gartennoù-bizit, e blaketenn-vrudañ, e lec'hienn Internet, testeniekadurioù ofisiel ar gratadurioù a ro evit gwerzhañ imboudoù surjianerezh : bep tro en em gaver gant ar brezhoneg pa'z eer e darempred gant Askorn Medical.
- 2- Abaoe pell zo e vez kelennet brezhoneg ha Breizh zo anavezet mat evit he barregezh war an teknologiezhioù nevez ; koulskoude ne oa ket bet bodet an 2 varregezh-se betek-henn. Gant **Edubreizh**, un embregerezh eus Lanniliz, eo bet didoullet ar mank : un e-kelenn evit ar brezhoneg zo bremañ. Un ostilh a-bouez eo evit ar 5000 den deuet a zo o teskiñ ar yezh e Breizh hag er bed a-bezh.
- 3- **Les Amis du bois** zo un embregerezh eus Enez-Frañs a labour gant koad Jura. Ijinet o deus ur c'hoari nevez a blijjo kalz d'an holl vrezhonegerien, bihan pe bras. Ur c'hoari lizherennoù eo, a c'heller ober gantañ er familh ; displeget eo e reolennoù e brezhoneg ha diouzh ezhommoù ar brezhoneg eo savet ivez : ur "c'h" pe ur "ch" a vank deoc'h evit sevel ho ker ? Gant "C'hoari gerioù" e vo posupl !



PRIZIOÙ 2012



RUMMAD FRAMMOÙ PUBLIK

- 1- Ti-kêr Karaez** zo anavezet evit e labour a-du gant ar brezhoneg. Ar gumun nemeti e Breizh o vont gant label 4 ar garta Ya d'ar brezhoneg eo zoken. Karaez zo e penn ar jeu hag o vont gant hentoù nevez atav. P'eo tremenet tro Frañs war varc'h-houarn en hañv tremenet e oa deuet a-benn an ti-kêr da gendrec'hiñ an Dro da lakaat pep tra en div yezh. Met un dra all zo deuet brav e kêr-benn ar Poc'hêr nevez zo : ar gumun gentañ e Breizh hag e Frañs eo ma vo lakaet ur studiadenn war ar brezhoneg stag ouzh an niveradeg. E neblec'h all ebet ne oa bet asantet gant an EBSSA ober ur studiadenn a-ratozh er mod-se. Gant ul labour pennek ha gant sikour Ofis Publik ar Brezhoneg ez eus bet kinniget un teuliad solut e Pariz ha deuet eo Karaez a-benn eus un taol-kaer adarre.
- 2- E Kumuniezh-kumunioù bro Kemperle** e kresk kalz an niver a skolidi en hentadoù divyezhek. Bep bloaz e vez krouet hentadoù divyezhek nevez hag ouzhpenn 330 skoliad zo gant ar c'helenn divyezhek du-hont. An dilennidi o deus divizet ambrougiñ al lusk-se, en o c'humun met er gumuniezh-kumunioù ivez : votet eo bet ar garta "Ya d'ar brezhoneg" ha roet lañs ez eus bet d'un toullad oberoù evit ma vo muioc'h a vrezhoneg er vuhez pemdez, er skol met er-maez eus ar skol ivez (poull-neuiad...). Evit heuliañ an teuliad-se ez eus bet divizet envel ur besprezidant e-karg eus ar brezhoneg, un dra n'eus ket e kumuniezh-kumunioù all ebet.
- 3- E Bruz**, e-kichen Roazhon, ez eus lañs gant ar brezhoneg. Ur gumun a 15000 annezad eo ha tost da 10% eus skolidi ar skolioù-mamm zo en hentad divyezhek bet krouet e 2003. Aze ivez ez eus bet divizet gant an dilennidi ambrougiñ lañs ar yezh : savet ez eus bet ur bodad gant Bruziz evit dibab oberoù ar garta « Ya d'ar brezhoneg » hag ar c'huzul-kêr en deus divizet mont gant 12 ober da gas ar brezhoneg war-raok.

RUMMAD KEVREDIGEZHIOÙ

- 1- E Breizh ez eus skolioù divyezhek abaoe ouzhpenn 30 vloaz bremañ. Kalz int aet war-raok. Un tamm bihan a-gostez eo bet lezet bed ar vugaligoù ha koulskoude, a-raok ar skol e vez degemeret ar vugale e frammoù : ar magourioù an hini eo. Gant **Babigoù Breizh** ez eus bet krouet un dra gortozet abaoe pell : ur vikromagouri divyezhek dre soubidigezh, un dra nevez e Breizh. E Gwened eo bet digoret, anv zo dija eus un eil mikromagouri hag un tamm e pep lec'h eo dedennet ar gerent gant ar soñj fiziout o foupigoù d'ul lec'h degemer a ya endro e brezhoneg.
- 2- E **Mirdi ar Vezhinerien** e Plougerne e vez laket war wel istor ha glad ar vuhez war an aod. Brezhoneg a oa gant ar vezhinerien hag e brezhoneg e c'heller dizoleiñ o mod da vevañ er mirdi-se : n'eo ket war ar paperioù nemetken, enfredet ez eus bet ur brezhoneger evit degemer an dud. Ur servij a dalvoudegezh eo evit skolaerien ha skolidi divyezhek ar vro.
- 3- **Symphonie de Breizh** zo ur gevredigezh a laka en a-raok sonaozourien vreton eus mare an XVIII^{vet} kantved. Ober a ra gant ar brezhoneg en holl hec'h embannadurioù ha liammet e vez er mod-se ar yezh hag ar sonerezh barok.

RUMMAD TEULFILMOÙ

- 1- « **Din-me da c'hoari** » gant Maï Lincoln hag Erwan Kermarrec, (kenbroduet gant Kalanna ha France 3 Breizh) a ziskouez poltred un den yaouank ampechet a grog da vezañ emren en e vuhez.
- 2- « **Ar Sica** » a gont stourm ar broduerien legumaj a Vro-Leon evit produiñ ha gwerzhañ gwelloc'h o froduioù (Produet gant France 3 Breizh).
- 3- E « **Allah's Kanañ war an hent** » e tiskouez Mikael Baudu buhez ul laz-kanañ a vrezhonegerien yaouank aet da Iwerzhon (kenbroduet gant Gwengolo filmoù ha France 3 Breizh).



PRIZIOÙ 2012



RUMMAD PLADENNOÙ

- 1- **"Tân"** eo pladenn divyezhek kentañ Lleuwen.
- 2- Gant **"Ehan"** e krog kaner ar strollad pop-rock EV, Gweltaz Adeux, gant un hent nevez : e hini.
- 3- War **"Noz an Nedeleg"** ez eus bet savet kanaouennoù nevez evit ar gouel-se gant Yann Raoul (Pr. Coop Breizh).

RUMMAD LEVRIOÙ

- 1- **Yann Bijer** en deus savet ur romant istorel, « Torr e benn » e anv (Emb. Al Liamm) diwar-benn emsavadeg ar Bodedoù ruz.
- 2- **Mich Beyer** he deus skrivet ur romant polis du : « Andon ar gasoni » (Emb. An Alarc'h).
- 3- **Bernez Tangi** a ginnig gant « Ar Saouzanenn » (Emb Skrid) ur rummad a varzhonegoù nevez.